

SKRIVADENN AN EMGLEV

D'ar Sadow 5 a viz Meurzh 2005

Ar filaj

Noz eo, yen eo an amzer. E miz Genver e vez yen alies. Met erc'h n'eus ket. E Breizh ne vez ket graet boulomoù-erc'h gwall alies ! Gouloù a zo e ti Yann Dastumer, ha tud, un ugent den bennak, kozh ha yaouank. Nozvezh ar filaj eo

Fin skrivadenn ar CE

Enor d'ar re gozh da gentañ : Job Gwiader eo a zigor an abadenn.
"Kas a rin ar sonenn ha c'hwi a ziskano din," eme-eñ. Ha setu Job da gas e sonenn :

"A-benn dilun, me 'yay d'ar foar..."

"Dilun, dimeurzh, dimerc'her, diriaou, digwener ha disadorn : anavet eo ar sonenn ha kanet e vez a-galon.

Fin skrivadenn ar CM

Erru eo ar Sul hag echu eo sonenn Job. Ne bad ket mui Anna al Louam, n'eo ket evit derc'hel ken : c'hoant he deus da lâret ur gontadenn. Anavout a ra re verr : ur c'hardeur a zo berr eviti. Anavout a ra re hir ivez, un hantereur pe tri c'hardeur.

"Klevet ho peus istor an tri den abil ?"

Fin skrivadenn ar skolaj

"Tri den abil ha forzh pinvidik a goanie kevret er memes ostaleri. Pe anv e oant, pe vicher o doa ? N'er lârin ket deoc'h.

Un herradig tremenet, setu atav an tri den-se aet ha barbotat a-zivout an dra-mañ hag an dra...ha dav-dav ha dav-dav. Hag emberr en o gweler lakaat koustele a-fed o abilted. Un trezol prizius-meurbet a lakaont evit bout priz ar burzhud brasañ..."

Laouen-bras eo Yann Dastumer : un eostad kaer en do !

Fin skrivadenn lise/oadourion